

Niv 1

GOUEL YANN 1954

# SKOL

DA STUMADENN CHWECHMIZIEK

A GELENNOURIEZH

T A O L E N N .

A-raok kregiñ gant an erv, gant SKOL	paj. 1
Ar Brezhoneg er skolioù kristen, gant A.ar C'Halvez	- 1
Aergelo'h Breizhat er Skolioù, gant A.ar C'halvez	- 3
Penaos kelenn ar Brezhoneg evel eil yezh, gant A.ar C'halvez	- 8
Ar C'hembraeg e Skolioù Kembre, gant A.ar C'halvez	- 12
Levrioù evit ar vugale hag ar skolioù, gant Herve Konan	- 23
A-dreuz lenn, gant Herve Konan	- 25

==0==

## A-BAOK KREGIN GANT AN ERV.

En dastumadenn nevez-mañ e klaskimp komz eus an holl zanveziou en deus ar skolaer da gelenn. An holl bennadoù a vezo aozet e Brezhoneg.

Daou eus ar skoilhoù a harz ouzh ar yezhoù bihan a vezañ implijet evit kelenn a zo an dicuer a c'herioù ha divarregezh ar skolaerion d'ober gant o yezh c'henidik o vezañ ma'z int bet stummet en ur yezh estren. Fellout a rafe dimp lakaat hor yezh da blegañ da holl ezhommoù ar skol a-vremañ hag en em varrekaat da gelenn dre ar yezh-se. Hon-unan, n'hellimp ket tizhout ar pal-se nag oberlabour disi, gant se e c'houlennomp digant hor c'heneiled kas dimp pennadoù ha buruteladennoù da embann.

## S K O L .

---

### AR BREZHONEG ER SKOLIOU KRISTEN (°)

Danevell lennet e Bleun-Brug Landreger, d'ar 1<sup>añ</sup> a viz Eost 1952

Ne adlavarin ket ar pezh a oa bet displeget warlene gant an Ao.Kaourantin RIOU a gomzas dreist-holl eus stad ar Brezhoneg er skolioù kristen. Goulennet ez eus bet diganin displegañ perak ne vez ket kelennet muioc'h ar yezh er skolioù kristen. Lavarout a rin deoc'h ivez petra a vefe d'ober, d'am soñj, evit gwellaat he stad.

#### 1. Ar skoilhoù.

Tri skoilh a harzh ouzh ar yezh a vezañ kelennet muioc'h : ar vistri, ar familhoù, an arnodennoù.

Ar Vistri.- Kalz a vistri gallegerien a zo anezho e Breizh-Izel ; ne fell ket dezho deskiñ hor yezh ha darn anezho a zo enebourien touet dezhi. El lodenn vrezhonek eus eskopti Sant-Brieg ha Landreger ez eus 42 beleg er skolioù kentañ , anezho 23 brezhoneger, 4 Breizh-Izelad nan-vrezhoneger, 15 Breizh-Uhelad.

E-touezh ar 23 brezhoneger, darn ne gredont ket en amzer-da-zont ar Brezhoneg, a zo evito ur yezh divarrek ha tonket da vervel, evel an holl yezhoù bihan. Darn all, a garfe ober un dra bennak ; skoilhoù e-leizh a gavont war o hent : ar familhoù hag an arnodennoù.

Ar Familhoù.- Evit ar familhoù un dra hepken a gont : ar santifikad ; ha n'eo ket hep abeg. Evit kaout ur vicher ez eo ret alies bezañ tremenet an testeni-se. An amzer tremenet o studiañ ar yezh a zo amzer gollet ha netra ken. Bremañ , muioc'h-mui, e vez komzet galleg ouzh ar vugale, zoken war ar maez, dre ma kav d'ar gerent e vint barrekoc'h war ar galleg diwezhatoc'h hag evit ober evel an dud uhel, pe zesket en-dro dezho. Ar c'hiz eo, hag ar c'hiz a zo nerzhus.

An Arnodennoù.- Ar Brezhoneg ne dalvez ket evit ar santifikad. En eskopti Kemper ha Leon e c'hell talvezout da dremen eksamin an testeni uhel (certificat supérieur) a zigor dorioù ar 4<sup>vet</sup> klas er skolioù-etre. En arnodenn-se, ar Brezhoneg a c'hell bezañ implijet e-lec'h ar saozneg pe ur yezh vev-all bennak. N'heller ket ober kemend-all en eskopti-mañ.

Daoust ma n'eo ket va zachenn, n'hellan ket tremen hep komz eus ar vachelouriezh.



## AERGELC'H BREIZHAT ER SKOLIOU. (1)

Unan eus paliou an deskadurezh a zo reiñ da santout d'ar bugel ez eo dleour d'ar gevredigezh, d'ar gevredigezh vedel. Ar bugel avat n'hell ket kompren kement-se a zo ur menoz diouzhan dud vras. Evitañ ar gevredigezh a zo e familh, e barrez, e derouer, e vro. Mont dezhañ dre un hent-all a zo ober eus ar bugel un estranjour en e vro, diouziiek eus ar pezh en deus graet anezhañ, hag a dlefe bezañ e aergelc'h naturel ; hag alies ivez, leun a fae evit kement-se. Anavezout a reomp rumadoù tud yaouank diwriziennet a-grenn, hejet ha kaset gant an holl avelioù, hep doujañs na karantez evit an amzer dremenet nag an amzer da zont. Roudoù an amzer dremenet an o zouezh a zo mut evito. (2).

Lavaromp c'hoazh ez eo ul lezenn a eoneiezh mont eus an anavezet d'an dianav. N'eus nemet an doare-se hag a c'hellfe lakaat spered ar skoliad d'en em santout e surentez ha da grouiñ ennañ fiziañs er skiant kelennet.

Ur seurt doare a zo kontrol evel just d'ar spered jakobin deuet dimp eus an Dispac'h hag a ren c'hoazh er Frañs, ha koulskoude e fell dimp diskouez ez eus tu e Breizh, d'ar mare-mañ, e diabarzh ar stern gall a zeskadurezh da dizhout ar pal-se dre grouiñ er skol un aergelc'h breizhat, hep kontañ ar pezh a c'hellfed ober war dachenn ar yezh.

### Ar C'Han.

Aes eo deskiñ d'ar skolidi kanaouennoù ha chañsonioù o c'horn-bro. N'eo ket marv c'hoazh gouenn ar ganerien, ha dreist-holl ar c'hanerezed. Tu a zo c'hoazh da zastum Noueloù, Luskellerezed ha sonioù farsus barrek da blijout d'ar vugale. En hor parrez, hon eus dastumet, e c'hwec'h miz, tregont chañson gozh ha n'eo ket echu c'hoazh hon eost. En ur ober en doare-se e vo desket d'ar re yaouank selaou ar re gozh, ha acout doujañs evit o deskamant hag o skiant-prenet.

Bez' ez eus dastumadennoù kanaouennoù brezhonek pe c'hallek eus Breizh-Uhel hag a c'hall ivez bezañ implijet. Arabat ober re implij eus tonioù ar broioù keltiek-all. Arabat beuziñ personelezh ar re yaouank, an ijin breizhat na glask nemeñ an tu da ziflukañ ha da vleuniañ adarre.

Er c'hour izel (cours élémentaire), e c'heller implijout troidigezhioù pe adaozadurioù war donioù breizhat. Bourgault-Ducoudray en deus diskouezet an hent. Er c'hour krenn hag er c'hour uhel e vo tu da zeskiñ kanaouennoù brezhonek, zoken d'ar c'hallegerien.

Arabat ankounac'haat ar c'hanaouennoù gallek gouestlet da Vreizh. Sonjal a reomp e re vBotrel dreist-holl. An tonioù n'int ket breizhat, ar c'houzoù a zo ur blaz romantel ganto, met barrek int da entanañ karantez evit ar vro e kalonoù ar yaouankiz.

### An Dañsoù.

Bez' ez eus c'hoazh un dachenn eo'hon hag hogos difraost, hini an dañsoù. Ne vefe ket mat avat, klask da gentañ gonid arc'hant dre aozañ abadennoù, met da gentañ-holl plijout d'ar vugale a gar jestraouiñ ha meskañ, deskiñ dezho ober jestraoù brav hag heneuz hag ober d'o c'horf labourat hag embreger.

E meur a skol e tesker c'hoari ar pif. War ar benteg bihan-se e c'heller c'hoari tonioù breizhat ha goude e c'heller kregiñ en ur vombard pe en ur binioù.

### Lennegezh Vreizhat.

En holl skolioù, er c'hour-stummañ (cours préparatoire) dreist-holl e lenner kontadennoù ha marvailhoù. Re Andersen ha Grimm a zo dispar, sur-mat, met bez' ez eus ivez e Breizh traoù hag a zo par dezho hag a blijo kement d'ar skolidi en hor bro. Lennit dezho "Troioù Bilz", dastumet gant Fañch an Uhel e Plouared,

hag e welot. (3)

D'ar re vrasañ, da skolidi ar c'hourioù krenn hag uhel ez eus tu da lenn troidigezhioù danevelloù berr e giz re Jakez Riou ; war dachenn an danevelloù berr hon eus e Brezhoneg labourioù par da re ar yezhoù-all ; pennadoù tennet eus pezhioù-c'hoari ha romantoù. Arabat dreist-holl disonjal ar barzhonegoù a c'heller tennañ diouto displegadennoù a-zoare. Dre bleustriañ seurt oberennoù e teuo ar skolidi hag ivez ar vistri da santout petra eo un oberenn lennegel vreizhat, pegen disheñvel eo diouzh kalz a oberennoù gallek, re dechet, en amzer dremenet da vihanañ, da liveañ santimañchoù faos ha da ober gant klichedoù.

#### Douaroniezh.

Alies e vez klemmet ne vez ket kelennet istor Breizh nag an douaroniezh; ar gelennerien eo n'ouzont ket mont diouzh ar program ofisiel, na sentiñ outañ zoken. Krogomp gant an douaroniezh. Er c'hour izel e tleer reiñ d'ar skoliad un henchadur war studi an douaroniezh. Setu ar pezh a lavar ar program : "Ar c'hentelioù a vo aozet diouzh kustumiañ ar vugale da eveshaat ha da gompren fedoù an douaroniezh ha da boazañ ouzh ar gerioù eñn : Roudoù an Avel, koulzoù ha doareoù an amzer, an douaroù, digompezderioù an douar, an dourioù, ar mor, ar plant, an tiez ha tolpadoù an dud, o labourioù hag o doareoù-bevañ, ar binvioù-bale hag eskemm. An holl gentelioù-se a vo diazezet war evezhiadur al lec'h-bevañ ha displegadur taolennoù ; graet e vint da heul baleadennoù-skol hag al labourioù henchet. (travaux dirigés).

N'eus levr ebet evel just hag a glotfe gant ur seurt program, met bez'ez eus levrioù hag a c'hall servijout da henchañ : enno e kaver an displegadurioù dre vras, hag ar skouerioù a c'hall bezañ dibabet war al lec'h. Ar c'hartennoù-post a zo prizioù evit kement-se. Arabat ivez ankounac'haat ar baleadennoù bras dibenn-skol. Tro a roont da ober anaoudegezh gant doareoù eus douaroniezh korfel, ekonomikel ha denel ar vro.

Er c'hour krenn e c'houlenn ar program : "Douaroniezh lec'hel studi dre evezhiadennoù, an eñnañ ar gwellañ, eus ar gêr hag eus ar c'horn-bro a zo endro dezho. Aozañ gant ar skolidi monografiennoù bihan eus ar geriadenn, ar gêr pe ar c'harter..." (§ I.)

Eus program ar C.E.P. (certificat d'études primaires) etennomp kement-mañ : "Ar rannvroioù naturel bras : studi an douaroniezh naturel, denel hag ekonomikel. Da gentañ e vo kenteliet ar skolidi war o rannvro ha studiet pizh ha don awalc'h." (§ 2,b.)

Program ar c'hour krenn a c'houlenn avat kalz a labour, a ouiziegezh hag a amzer. Met pegen plijus ur seurt labour. E meur a lec'h ez eus bet savet dija monografiennoù ha dav e vefe lakaat an dorn warno. E lec'hioù-all emañ pep tra da ober ; Kreston en deus savet ur raktres talvoudus a c'hell bezañ implijet dre-holl. Displegadurioù, henchadurioù e-leizh a vo kavet ennañ. Levr an Ao. POISSON, "Géographie de Bretagne", aozet evit ar skolioù kentañ ha daou levr bras Maurice LE LANNOU "Géographie de la Bretagne", aozet hemañ evit tud vras, a vo talvoudus er c'hour uhel hag evit ar C.E.P. Evit al labourioù hag ar poelladennoù e vo tu da implij taponioù kaoutchoug eus an departamantoù hag eus Breizh e-giz ar re a zo bet embannet gant Ti Pierron, Sarreguemines, (Moselle).

Al levrioù avat a gosha buan rak ekonomiezh Breizh a gemm buan, ha ret e vo d'ar mestr-skol koustiañsus heuilh buhez ar vro evit bezañ barrek da glokaat ha da reizhañ zoken ar c'hentelioù darbarek gant al levrioù.

Istor.

Evit studi an istor e c'houlenn ar program heuilh an hevelep hent. Setu ar pezh a lavar evit ar c'hour izel hag ar c'hour krenn : "implijet e vo ar muiañ posubl pinvidigezhioù ar barrez hag ar parrezioù tro-war-dro : ilizoù, savadurioù, roudoù, rivinoù, lec'hioù istorel, moneizioù, medalennoù... da zigeriñ an istor lec'hel d'ar vugale e-doug baleadennoù hag abadennoù al labourioù henchet." Mar sent ar skolaer ouzh an alioù-se, en ur gregiñ gant istor e gorn-bro, e teuo da gomz eus istor Breizh a-bezh. Alies hon eus gwelet goulenenn ma vefe roet kentelioù war istor Breizh en tu-hont d'ar c'hentelioù war istor ar Frañs. Ur fazi e vefe, e-keñver ar gelennoù, heuilh an doare-se. An istor lec'hel a dle bezañ studiet da gentañ, ha tamm-ha-tamm e tleer ledanaat tachenn-welout ar bugel ; a-giz-se e kompren gwelloc'h an darvoudoù, hag al liamm o stag an eil ouzh egile. Kentelioù dispar, evit ar mestr hag ar skolidi a zo da sevel diwar-benn ar Ragistor e Breizh, ar Gelted, ar Romaned, douaridigezh ar Vretoned hag ar Sent kozh... ha n'eo ket al levrioù a ra diouer war an dachenn-mañ. Kavour a reer levrioù a ouiziegezh, levrioù-brudañ ha levrioù evit ar skolidi e galleg hag e Brezhoneg.

Monografiennoù e-leizh a zo bet aozet ha kalz anezho a zo bet embannet gant Kevredigezhioù Istorel an Departamantoù. N'eus nemet mont da furchal on o dastumadoù ; ar renerien anezho ne glaskont gwelloc'h eget skoazellañ, aliañ ha gwerzhañ al levrioù a chom da bouldrenniñ en o armeloù. (4)

Muzeoù.

An istor n'eo ket hepken studi an darvoudoù, met ivez studi buhez holl renkadoù ar gevredigezh ha dreist-holl, marteze, buhez al labourerien. War an dachenn-se, e vo roet ar gentel wellañ gant ar re a zo bet test eus an amzer dremenet hag o deus lakaet o sesteni dre skrid, hag an traoù a zo deuet dimp hag a zo miret er muzeoù, dreist-holl er muzeoù-pobl. Aes eo da vugale ar c'herioù a berc'henn unan, ha da vugale ar c'humunioù tro-war-dro daremprediñ anezho ; tu a vefe ivez da gas ar re-all d'o gweladenniñ e-kerzh ar baleadennoù dibenn-skol.

Nevez 'zo en ur studiadenn ouestñet da ekonomiezh Breizh, e c'houlenne an Ao.Philippeau, eil iskelenner war an Douaroniezh, ma vefe krouet e Roazhon ur Muze breizhat ha kement-se evit mad an douristelesh.(5). Ni a c'houlenn kemend all en anv skolioù ar vro. Pa anavezzer Muze Broadel Kembre e Kerdiz, hag ar Muze-Pobl, e-kichen an hevelep kêr, e santer don pegement e reont diouer dimp e Breizh. Er Muze Broadel e c'heller studiañ douaroniezh, plantoniezh, loenoniezh, hendraouriezh, buhez ar bobl hag arzoù bro-Gembre. Ar Muze-Pobl, e Saint-Fagans, a zo bet krouet diwar skouerioù ar broioù skandinaviat : Sued, Norvegia ha Fennland. E bal a zo diskouez buhez an tremened, ha displegañ penaos eo stag an amzer a vremañ outañ. E Skansen, Sued, da skouer e kaver displeget istor ar binvioù d'ober war-dro al laezh. Er muse-pobl n'eo ket hepken un ti da annezñ traoù, met un dachenn ec'hon ma adsaver warni a bep seurt savadurioù : tiez, kaerzioù ha krevier.

Aes eo kompren efedoù ur seurt kelennadurezh. Da gentañ, plijout a ra d'ar skolidi hag o lakaat da studiañ gant aked an danvezioù kelennet. D'an eil o lakaat a ra da garout ar pep gwellañ eus ar pezh a ra o bro, ha da garout ivez pinvidigezhioù ar broioù-all, he deus pep hini anezho un herez sakr. Preparaet e vint ivez da labourat evit o bro gant kalon ha gant ur spered sklerijennet mat.

N.B.- Da heul ar studiadennig-mañ e vo kavet roll al levrioù meneget hag ivez un nebeut re-all a c'hell bezañ talvoudus d'ar skolidi pe d'ar vistri.

Hon labour a zo diglok ; traoù 'zo a zo bet roet dezho un taol-sell hepken,

traoù-all, evel ar c'hoarioù, a zo bet lezet a-gostez. Koulskoude e rento ser-  
vij evel m'emañ, spi hon eus da vihanañ.

#### Notennoù.

- (1) - Kaozeadenn graet en emvod Bleun-Brug Eskopti Sant-Brieg, e Boulvriag, d'an  
21 a viz Du 1953.
- (2) - Ur souezh hag ur blijadur eo bet evidomp lenn e "La Croix", ar 14/II/53 an  
hevelep menozioù dindan bluenn Pierre l'Ermite en e bennad "La Mère".
- (3) - N'eo ket amañ al lec'h da gomz eus talvoudegezh kelennerezhel ar c'honta-  
dennoù. Displegadurioù mat e vo kavet e levr Sara Cone Bryant "Comment racon-  
ter des Histoires à nos Enfants", Librairie Fernand Nathan.
- (4) - E 1954, e vo embannet gant "La Société d'Emulation des Côtes-du-Nord ur  
roll eus al labourioù moulet ganti abaoe an deoù ha kement-se da geñver he  
c'hantvet deiz-ha-bloaz.
- (5) - Gwelout "Ouest-France", d'ar Meurzh 20 a viz Here 1953.

#### LEVRLENNADUR BERR

##### ISTOR :

Durtelle de Saint-Sauveur : "Histoire de Bretagne"; Plihon, Roazhon.  
du Cleuziou - de Calan : "Histoire de Bretagne"; Prud'homme, Sant-Brieg.  
Poisson : "Petite Histoire de Bretagne"; Lafolye, Gwened.  
Poisson : "Histoire de Bretagne", Roazhon.  
Dihunamb : "Istoer Breizh"; Dihunamb, an Oriant.  
Kreston : "Les monographies de communes"; Ar Falz, Dirinon (Finistère)  
Waquet : "L'Art Breton"; Arthaud, Grenoble

##### DOUARONIEZH :

Poisson : "Géographie de la Bretagne", Lafolye, Gwened  
Le Lannou : "Géographie de la Bretagne"; Plihon, Roazhon.

##### LENNEGEZH :

Herrieu : "La Littérature Bretonne depuis les origines jusqu'au 20e siècle,  
suivie d'extraits traduits des meilleurs auteurs"; Dihunamb 1943  
R.Hemon : "La Langue Bretonne et ses Combats"; Skridoù Breizh, Ar Baol 1947  
Rudel : "Panorama de la Littérature Bretonne, des origines à nos jours.";  
Imprimerie Bretonne, Roazhon 1950.  
Drezen : "Notre-Dame Bigouden", troidigezh gallek, raklavar ganr J.Merrien,  
Editions Denoël, Pariz 1943.  
J.Riou : "L'Herbe de la Vierge", dastumadenn danevelloù troet diwar ar Brezho-  
neg; Aus Portes du Large, Naoned 1947.  
T.Malmanche : "Les Pafens. Gurvan, le Chevalier Etranger", Librairie Celtique,  
Pariz.  
X.de Langlais : "L'île sous Cloche", troidigezh gallek "Enez ar Rod"; Aus Portes  
du Large, Naoned 1946

##### KONTADENNOU :

J.Dorsav : "Contes d'Armorique"; Nathan, Pariz.  
F.Cadic : "Contes Bretons sur Douze Métiers"; Librairie Celtique, Pariz 1943.  
F.Cadic : "Contes et Légendes de Bretagne", Levr.1añ; Gallès, Gwened 1950.  
F.Cadic : "Chants de Chouans"; Librairie Celtique, Pariz 1949.  
E.Souvestre : "Contes de Bretagne", Le Liseron, Pariz 1946.  
E.Souvestre : "Le Foyer Breton"; Vigneau, Pariz 1947.  
Luzel : "Veillées Bretonnes"; Librairie Celtique, Pariz 1944  
Sébillot : "Contes Populaires de Haute-Bretagne"; Charpentier, Pariz 1880.  
A.Le Braz : Oberoù embannet gant Calmann-Lévy, Pariz.

**KONTADENNOU E BREZHONEG :**

- Troude ha Milin : "Labous ar Wirionez ha Marvailhoù-all"; Skridoù Breizh, Ar Baol  
 G.Milin : "Gwechall-Goz e oa"; Le Goaziou, Kemper 1924.  
 Luzel : "Kontadennoù ar Bobl e Breizh-Izel"; Le Goaziou, Kemper 1939.  
 Crocq : "Eur Zao'had Marvailhoù"; Le Goaziou, Kemper 1924.  
 Dir-na-Dor : "Pipi Gonto"; Le Goaziou, Kemper 1925  
 Yann ar Floc'h : "Kochennoù ar Ster Aon"; Le Dault, Kemper 1950.

**KANAOUENNOU :**

- Kerlann : "Trente chansons populaires bretonnes"; Ar Falz, 1936  
 Bourgeault-Ducoudray : "Trente Mélodie Bretonnes"; Lemoine, Pariz  
 Paotr Treoure : "Barsaz ha Sonioù"; Brest.  
 Paotr Treoure : "Mojennoù ha Sonioù", Imprimerie Centrale, Roazhon.  
 L.Lohier : "Kannamb Bugale"; Pondivy 1949.  
 G.Arnoux : "Vingt Chansons Bretonnes"; Lemoine, Pariz 1950.  
 Le Gall : "Kantikoù kendoniet"; Le Gall, Pleubian 1953.  
 J.le Penven : "Sonit'ta Sonerion, tonioù eus ar Vro" (tonioù evit ar biniou )  
 B.A.S. 1947  
 J.le Penven : "Tralalalaleno", tregont kanaouenn brezhonek kendoniet evit 2 ha  
 3 mouezh ingal; E.M.B. , Pariz 1949.  
 J.le Penven : "Kanaouennoù", daouzek kanaouenn vrezhonek kendoniet evit peder  
 mouezh disheñvel. B.A.S.  
 P.Monjarret : "Yaouankiz a Gan", pemzek kanaouenn vrezhonek kendoniet ;  
 Kendalc'h, Kemper  
 P.Monjarret : "C'Houez er Beus", pevar ugent ton evit ar biniou hag ar voubard  
 Y.V.Perrot : "Sonioù Feiz ha Breiz",; Brest.

E levrioù ar Penven ha Monjarret e kaver kanaouennoù eus Breizh-Uhel.

**A BEP SEURT :**

- E.Rannou : "La Bretagne mieux connue par la dictée du certificat", Brest 1935.  
 Léon Le Berre : "Bretagne d'Hier"; Ouest Eclair, Roazhon 1937.  
 Ed.Olole - Brittia : Levrioù a bep seurt evit ar vugale

~~~~~

**PRENIT ADALEK BREMAN EIL NIVERENN "SKOL"**

a vo embannet war - dro NEDELEG 1954

En niverenn-se e kavot :

- pennadoù eus al lizhiri a zo, pe a vo, bet kaset dimp ;
- pennadoù diarbenn an deskadurezh en Izelvroioù hag an div-  
yezhegezh e bro-Friz.
- un danevell diarbenn labour ar Bleun-Brug e skolioù kristen  
Eskopti Sant-Brieg e-doug ar bloaz-skol 1953 - 1954 ;

ha traoù all e hoazh .

## PENAOB KELENN AR BREZHONEG EVEL EIL YEZH. (1)

Peogwir, betek-hen, n'eus skol ebet o kelenn DRE ar Brezhoneg, (d'ar mare, e kelenner dre ar Galleg), ez eo ar Brezhoneg kelennet evel eil yezh hepken. E Breizh e c'heller rannañ ar skolidi e daou rummad e-keñver an anaoudegezh o deus eus ar yezh : er rummad kentañ e lakaomp ar vugale a gomz ar Brezhoneg a-vihanik, pe a gompren anezhañ mat awalc'h da vihanañ; eneil rummad, ar re ne gomprenont ket ar yezh hag o deus klevet komz anezhi gwech-pe-wech, pezh a zo talvoudus, hag ivez ar re n'o deus anaoudegezh ebet anezhi.

Ul lezenn hag a vo da sentiñ outi en hon darempredoù gant an daou rummad eo houmañ : ar skol vrezhonek a rank bezañ plijus ; anez se e teuo ar vugale da adlavarout abred ar pezh o deus klevet o c'herent o randoniñ alies : ar Brezhoneg ne servij da netra (2). D'am sonj, hor pal a dle bezañ, d'ar mare, lakaat ar skolidi da vezañ barrek da lenn ar yezh gant aezamant ha plijadur ; war un dro e vo gwellaet ar yezh komzet hag e vo hadet en o spered ar c'hoant da skrivañ. Al labour boulc'het e skolioù an derez kentañ a vo kendalc'het gantañ e re an eil derez.

## I

## Skolidi ar rummad kentañ

Meur a ziaesamant a zeu d'ar vugale-mañ eus an doare skrivañ, evel m'o defe diaezamantoù ar c'hallegerien vihan a vefe bet skoliataet en Alamaneg pe grogfent gant studi o yezh, pe c'hoazh ar c'hallegerien vihan a gomz ur rann-yezh pa'z eont d'ar skol c'hallek. Setu int amañ :

- 1) - an doare skrivañ n'eo ket heñvel mik ouzh doare distagañ rann-yezh ebet, nemet hini Leon e vefe ;
- 2) - doare skrivañ ar Brezhoneg a zo disheñvel diouzh hini ar galleg : ar G distaget atav GU ; ILH implijet da aroueziañ ar son gallek ILL ; hag ar C'H, a zo anezhañ ur H c'hwezhet kreñv ;
- 3) - ar geriadur a gemm, tamm pe damm, eus an eil korn-bro d'egile.

Arabat avat reiñ re a bouez d'an diaezamantoù-se. Bugale vihan Breizh-Uhel a anavez re ar rummad kentañ hag an eil : sonioù ha gerioù o devez da zeskiñ, pa grogont gant studi ar galleg.

Ne gav ket din kennebeut e chomfe ar bugel da boellata war lizherennoù ar gerioù. Silabenn gentañ ar ger, al lizherenn gentañ zoken, pe c'hoazh ar skeudenn, a zo a-walc'h dezhañ evit divinout distagadur ar ger a-bezh. Gwelout a ran c'hoazh ur paotrig 6 vloaz hag a lenn e "Le Breton par l'Image", o vale e zaoulagad eus ar skrid d'ar skeudenn pa gej gant ur ger diaes dezhañ. Ar vugale o deus ur weledigezh hollek eus ar ger, zoken ar re a seblant bezañ donezonet fall evit ar reizhskrivadur. Bez' ez eus skolidi hag a luc'hskeudenn ar gerioù e gwirionez. Darn-all a skrive holl lizherennoù ur ger met o dilec'hio ; e gerioù evel sympathique ne ouezint ket pelec'h lakaat an h ; met taolit evezh : an distagadur ne vo ket distreset. Re-all a zilec'hio al lizherennoù betek kemmañ an distagadur : skrivañ a raint prote evit porte. Kement-mañ a zo ur c'hleñved bras dirak daoulagad ar skolaerien evel just, ha diaes eo da bareiñ. Evit disammañ ar skolidi a ra ur seurt fazi, e c'hellomp lavarout da vihanañ e sikouront ac'hanomp da welout an hent heuilhet gant spered an den pa vez o lenn : ar ger skrivet a zo evitañ ur skeudenn, ha nann ur steudad arouezioù.

Penaos en em gemer evit deskiñ lenn ? Lakomp e vefe gouestlet un eurvezh pep sizhun d'ar Brezhoneg, pezh n'eo ket kalz e gwirionez. Evit kregiñ, en tri c'hour, izel, krenn hag uhel, e c'heller ober gant LE BRETON PAR L'IMAGE.

Implijet hon eus al levr-se gant paotred a bep oad ha plijet en deus dezho holl. Ar c'hour izel a lakaio ur bloavezh da lenn anezhañ. An eil bloaz, e vo gallet implijout ul levr aes evel PER AR C'HONIKL (dezhañ 30 pajenn; 15 gant aroskrid, 15 gant taolenoù)., pe c'hoazh ISTOR BREIZH TOUTOUIG. Ul levr evel hini AN AOTROU SKANVING a zere ouzh an oad-se, et siwazh diviet eo. Dav e vefe en advoulañ, hag en ober gant lizherennoù brasoc'h. Ret eo dimp anzav hon eus nebeut a levrioù evit bugale an oad-se. (3)

Evit ar c'hourioù krenn hag uhel ez eus meur a levr : MARVAILHOU AR VRE-TONED a blijo kalz evel levr-lenn. Gout'ouzer ez eo un dibab pennadoù tennet eus ar gazetenn "Kroaz ar Vretoned". A bep seurt a gaver ennañ : pennadoù istor, kontadennoù, ha zoken barzhonegoù. Un dastumad lennadennoù, anezhañ 14 pennad, a zo bet embannet gant "Ar Falz" (4) dindan an titl : UN DORNADIG LENNADURIOU BREZHONEK EVIT AR SKOLIOU.

Tri levr-all a glask deskiñ lenn ha skrivañ : ME A ZESK BREZHONEG gant ar Vreudeur Uguen ha Seité; ME A LENNO, gant Yann Schier; VA YEZ KARET gant Alan an Diuzet.

ME A ZESK BREZONEG a zo rannet e teir lodenn. Kentañ lodenn : taolenoù-lenn silabennek. An taolenoù-mañ a zo bet aozet evit deskiñ lenn, evit deskiñ lenn Brezhoneg. Ne gredan ket en o efedusted, hag ouzhpenn arabadus e tleont bezañ evit ar vugale. Eil lodenn : lenn ha yezhadur. E pep kentel e kaver en tu-hont d'al lennadenn displegadurioù diwar-benn ar gerioù diaes, ar yezhadur, ha poelladennoù yezhadur dreist-holl. Trede lodenn : Alc'houez ar Brezhoneg Eün, gant R.Hemon. Evel ma weler dispartiañ a ra al levr-mañ studi ar geriadur evel geriadur, diouzh ar peurrest ha reiñ a ra kalz a blas da studi ar yezhadur ha nebeutoc'h da hini ar frazenn. Arabat dimp pouezañ re war c'hemmadurioù da skouer, a zo heñvel ouzh implij ar ger-mell le, la e galleg.

ME A LENNO a zo muioùc'h heñvel ouzh al levrioù a implijer er skolioù da zeskiñ ar galleg. Fellout a ra dezhañ deskiñ ar Brezhoneg dre ar Brezhoneg; pezh a zo, d'am meno, ur sonj mat. 48 lennadenn a zo ennañ, ha da heul pep hini ez eus : 1) ur bleustradeg-brezeg diwar-benn ar skeudenn; 2) ar gerioù displeget e Brezhoneg; 3) ar menozioù; 4) geriaoueg (studi gerioù nevez na gaver ket el lennadenn); 5) displegadur verb pe yezhadur; 6) un dresadenn. Ar rannoù 3, 4, 5, a c'hell talvezout da boelladennoù dre skrid. En ur ober un eurvezh Brezhoneg bep sizhun, ez eus ezhomm daou vloaz da studiañ ervat ME A LENNO. Neuze, ar skoliad a vezo barrek da lenn mat, da gomz fraezh ur yezh c'hlan ha da skrivañ reizh a-walc'h. An holl lennadennoù, nemet un nebeut barzhonegoù, a zo bet aozet gant Yann Schier e-unan diwar yezhoù-all, ha setu perak e kaver enno troioù-lavar, reizh sur-mat, met divoutin e-touezh ar bobl. A-wechoù ivez ne glot ket ar skeudenn gant ar skrid.

VA YEZH KARET a zo aozet un tamm evel ME A LENNO e-keñver meur a boent : implij a ra ar Brezhoneg hepken ha rannet heñvel eo pep kentel. War ar bajenn gentañ e kaver ar skeudenn hag al lennadenn; war an eil, an displegadurioù hag ar poelladennoù renket even-hen : 1) ar menozioù; 2) geriadur; 3) kemmadurioù; 4) yezhadur; 5) displegadur; 6) poelladennoù. Daoust ma'z eo bihanoc'h ment levr an Diuzet eget ment hini Yann Schier, daoust ma'z eo moanoc'h zoken, n'eus ennañ nemet 30 kentel, ez eus ezhomm daou vloaz d'e studiañ. Al lennadennoù a zo holl diwar bluenn aozer al levr ha kontañ a reont buhez pemdeziek bugale ur geriadenn a Vreizh. Daoust ma seblantont a-wechoù artifisiel, ar si-se a zeu dezho eus o orin, ez int bev-tre ha graet diouzh plijout d'ar vugale.

LE FRANCAIS PAR LE BRETON gant Le Bozec, daoust d'e vent ha d'e devder, a gin-nig d'ar skoliad 12 lennadenn hepken. Bez 'ez eo dreist-holl ul levr da zeskiñ gerioù ha reolennoù yezhadur brezhonek ha gallek lakaet keñver ouzh keñver. Ul levr ijinus-tre eo, skeudennet stank, moulet brav ha sklaer gant lizherennoù tev, moan ha stouet. E-giz eil titl e toug "Méthode Bilingue". Daoust ma'z omp a-du gant ur gelennadurezh divyezhek n'eo ket evel-se e tlefe bezañ lakaet da dalve-zout. Evit deskiñ yezhoù e tleer en em harpañ war otomatelezh ar spered ha nann war ar poell. Al levr-mañ, moulet e 1933, a oa d'ar mare ur bennoberenn; met abaoe an doare da gelenn ar yezhoù a zo aet war wellaat kalz. Koulskoude ar skolioù a berc'henn skouerennoù anezhañ a c'hell eimplijout gant ma ne vo ket torret re o fenn d'ar vugale gant reolennoù ha troidigezhioù, ha gant ma ouezo ar skolaer e vicher a gelenner.

## II

## Skolidi ah eil rummad.

D'am sonj, ar pal da dizhout gant ar vugale-mañ a zo an hevelep hini ha gant ar re-all, met war hent ar pal e tleer heuilh an urzh-mañ : lakaat ar skolidi barrek da gompren ar Brezhoneg, da lenn, da gomz ha da skrivañ. Degas a reomp da sonj ar pennwirionezioù-mañ a dle bezañ diazez kelennadurezh ar yezhoù d'ar vugale :

- 1 - ur yezh n vez desket dre an diskouarn, an daoulagad, ar genou hag an daouarn (dre skrivañ). Ar yezhadur a zesker diwezhatoc'h da sklerijenniñ ha da ur-zhiañ ar pezh a vez bet desket dija. Reiñ ar yezh a gelenner da vezañ klevet vet ha gwelet an aliesañ ar gwellañ.
- 2 - Ar vugale yaouank o deus aezamant ispisial da zeskiñ yezhoù. Kregiñ an abretañ ar gwellañ ;
- 3 - Studiañ un tamm bemdez ; lakomp 15 munutenn, pezh a ra 1 eur 15 bep sizhun.

Er C'hour Izel, ar pal da dizhout a zo lakaat ar vugale da gompren ar yezh ha da gomz un tammig, da vihanañ ma vez tu. Ar vugale a zo donezonet kaer evit deskiñ kanaouennoù, zoken er yezhoù n'anavezont ket. Deskomp dezho kanaouennoù farsus a zispleg un danevell evel Son ar Yarig hag Eured al Laouenanig. (5) Kemend-all a c'hellfemp lavarout eus ar Rimadelloù en abeg d'al lusk a zo enno. Mat e vefe skrivañ an testennoù war an daolenn-zu hag o lezel warni e-pad de-vezhioù. Ha tamm ha tamm, ar son, al lusk, ar gomz, hag ar ger a enlouc'ho spefed ar skoliad.

Er C'hourioù Krenn hag Uhel, diouzh ma tegouezho, e vo ret kregiñ pe gender-c'hel gant an doare labourat displeget uheloc'h : kanaouennoù, rimadelloù, met mat e vo ivez mont pelloc'h ; ar pal a vo amañ lakaat da lenn, da gomz ha, mar-teze, da skrivañ.

Evit deskiñ lenn e vo gallet implijout ul levr aes evel LE BRETON PAR L'IMAGE. Buan awalc'h e vo lonket ganto al levrig-se ha d'ar mare ne welomp hogos netra a vefe diouzh ar vugale-se : n'anavezont nemet un nebeut gerioù ha n'int ket c'hoazh boas a-walc'h ouzh frazennadur ar Brezhoneg (syntaxe). Sonjet hon eus en un das-gumad frazennoù aozet evit tud vras : METHODE RAPIDE gant R.Hemon. Lakaat bep beure war an daolenn ur gentel hag ober lenn anezhi div pe deir gwech, pe muioc'h zoken, a-hedan deziz. Merzet hon eus e plij d'ar vugale lenn divizoù. Skolaerien Kembre o deus merzet ivez an dra-se ha setu perak e lakaont e stumm divizoù, en ur yezh eün, kontadennoù brav. Troet hon eus e Brezhoneg un nebeut anezho ha c'hoant hor befe da aozañ re-all diwar gontadennoù breizhek.

Geriadur ar skolidi-mañ a vo dald'hmat un tammig skort ha daoust dezho bezañ boaziet ouzh ar frazennadur e vefent digalonekaet dirak pennadoù lennegezh aozet gant Brezhonegerien vat evit tud vras. Aliañ a reomp lakaat etre o daouarn skri-

doù e Brezhoneg eün, a zo diazezet war 2 000 ger dibabet ha renket gant Toparz Hemon hervez labourioù heñvel bet graet evit yezhoù all. Goude m'eo devo lonket al levriouigoù-se, e vo tu da reiñ dezho ul levr evel ME A LENNO. Komprenet e vo ganto ul levr evel hennzh dre m'eo skrivet er yezh-se o deus desket betek hen : ar Brezhoneg standart, a vo yezh an amzer-da-zont.

N'em eus ket komzet c'hoazh eus 40 PENNAD-LENN, embannet gant "AR FALZ" , nag eus YEZ HON TADOU, gant V.Seité ha Lorans Stephan, a zo bet aozet o-daou evit ar C'hourioù Klokaat. Al levr kentañ a zo hepken un dibab pennadoù, ul levr-lenn eo, hag ul levr lennegezh, ha néhell bezañ implijet nemet gant ar re a oar komz ha lenn ar yezh. An eil a zo ur gwir levr da zeskiñ ar Brezhoneg gant kentelioù ha poelladennoù diwar-benn ar geriadur, ar yezhadur, an displegatur - verb ha gant pennadoù da studiañ ha da lenn. En abeg da se e c'hell bezañ implijet zoken gant ar re n'anavezont ket ar yezh, met d'hor meno, e vefe fur lakaat da gentañ etre daouarn ar vugale ul levr evel LE BRETON PAR L'IMAGE pe c'hoazh LA METHODE RAPIDE da zigeriñ o spered da studi ar yezh.

#### Notennoù :

- 1 - Kaczeadenn graet d'ar 27 a viz Kerzu 1953 e Gwengamp.
- 2 - Pezh n'eo ket gwir penn-da-benn : ar Brezhoneg a zo degemeret er Vachelou - riez, er B.E.P.C., hag en Testeni Uhel (Certificat Supérieur) en Eskoptioù Kemper ha Sant-Brieg.
- 3 - Tu a zo da begañ skridoù brezhonek war levioù gallek. Goulenn paperennoù moulet digant Pêr Denez, Le Ris, Ploaëf, Douarnenez.
- 4 - Kelaouenn Skolaerien Vreizhat ar Skolioù Publik, krouet gant Yann Sohier, B.P. 19, Brest.
- 5 - Luzel I SONIOU, P.34; ton Duhamel. Kenstrivadegoù ar Bleuñ-Brug 1953.

#### ROLL AL LEVRIOU MENEGET :

LE BRETON PAR L-IMAGE, Imprimerie du Leon, Landernau  
 ME A ZESK BREZONEG )  
 YEZ HON TADOU ) ( M.V.Seité, Bleun Brug, Kastellin (Penn ar Bed)  
 LE FRANCAIS PAR LE BRETON, M.Le Moal-Dirnador, Koadout, dre Wengamp (Ao.an Hant.  
 40 PENNAD LENN, "Ar Falz", B.P.19 Brest.  
 MARVAILHOU AR VRETONED,  
 PER AR C'HONIKL,  
 METHODE RAPIDE,  
 LES MOTS DU BRETON USUEL CLASSES D'APRES LE SENS,  
 Skridoù Breizh, Square du Casino, La Baule (Loar-Izelañ)  
 ISTAR BREIZ TOUTOUIG, Editions Brittia.  
 ME A LENNO, Imprimerie Centrale, Roazhon.  
 VA YEZ KARET, Alain le Diuzet, Skolaer, Sant-Brieg.

Le sauvetage de la culture indigène ne peut se concevoir que si l'idiome en question réussit à s'adapter aux nécessités nouvelles. La population qui le parle changera de langue et cette substitution entraînera la mort de la civilisation à laquelle elle appartenait.

Dans la mesure où l'on estime qu'il est utile de préserver les civilisations locales, il devient indispensable d'adapter les langues qui en sont le support et sans lesquelles elles ne peuvent même pas se concevoir.

M. SAUVAGEOT

## AR C'HEMBRAEG E SKOLIOU KEMBRE .

Ur gudenn hon eus da zibunañ hiziv e skolioù Breizh : mirout yezh ha sevenadurezh hor bro, ar pezh a ra he fersonelezh, ha reiñ d'hor skolidi an deskamant eus ar skiantoù hag eus ar yezhoù o deus ezhomm anezho evit gonid o buhez. Ar gudenn-se a gaver ivez e broioù bihan all eus Europa, ha dibunet brav eo bet e meur a lec'h . An dro-mañ e tisplegomp dirak hol lennerien kudenn an Divyezhegezh e Kembre. Hor studiadenñ a zo pell diouzh bezañ klok, graet hon eus avat ar pezh hon eus gallet evit na vefe netra diwir enni, hag evel m'emañ e tegaso sklerijenn d'ar re a glask un diskoulm evit Breizh hag e tigor, spi hon eus, daoulagañ meur a hini. (1)

Setu amañ hor raktres :

- I. Stad ar yezh hervez niveradeg 1951;
  - II. Istor berr deskadurezh ar C'hembraeg ;
  - III. An divyezhegezh ;
  - IV. Labour kontelezhioù 'zo ;
  - V. Ganedigezh ar Skolioù Kembraek Nevez ;
  - VI. Darempredoù gant Pennadurezhioù an Deskadurezh ;
  - VII. Talvoudegezh an deskadurezh ;
  - VIII. Skolioù-etre ha skolioù Normal ;
  - IX. Enebadennoù .
- Klozadur .

## I. STAD AR YEZH .

Hervez niveradeg 1951 ez eus e Kembre 2 471 100 a dud. Ul lodenn anezho, 702 300, a gomz Kembraeg, pezh a ra 28,4 % eus ar boblañs. Ar C'hembraeg a zo komzet war an hanter eus gorread ar vro, met war al lodenn-se a veve diwar al labour douar, da lavarout eo, dre vras, gwalarn hag hanternoz ar vro. Ar Saozneg a zo deuet da vezañ yezh kontelezhioù an harzoù ha kontelezhioù ijinerezhel ar c'hreisteiz, a zo poblek-stank. Kemeromp ur skouer. E kontelezh Morgannwg, a gaver enni ouzhpenn an hanter eus poblañs Kembre, ez eus muioc'h a gembraegerien eget e kontelezhioù Môn, Caernarfon hag Aberteifi lec'h ma komz 70 % eus an dud ar yezh. Neozh, emañ ar C'hembraeg en arvar e Morgannwg dre ma komz 19,9 % hepken eus an dud ar yezh. (2)

## II. ISTOR BERR DESKADUREZH AR C'HEMBRAEG.

Amañ ne glaskomp ket tamm ebet studiañ dre ar munut istor an deskadurezh e Kembre. Koulskoude evit ma vo komprenet mat ar pezh a zeuio war-lerc'h n'hellomp ket tremen hep reiñ un alberz anezhi.

E 1846, tri den, savet e skolioù-meur Cambridge hag Oxford, a ra un enklask e Kembre hag a embann o danevell dindan an titl : "Blue Books" ("Al levrioù glas") Diskouez a reont Kembreiz evel tud dizesk ha dilezenn, ha tamall a reont ar yezh Gemraek ha relijion Kembreiz (3). E 1884 e voe graet ur c'houlennadeg gant Kevredigezh ar Genvreudeur. D'an holl renerien-skol e voe kaset ur bapereñ gant ar goulenn-mañ : Hag ur gonid e vefe, d'ho meno, degemer ar C'hembraeg da zanvez-keleñnadur e skolioù bihan Kembre ? War 622 respont, 336 a oa a-du, 254 a-enep, ha 32 a oa etre. Kalz eus ar vistri a veize mat-tre talvoudegezh ar C'hembraeg. Hogen kalz anezho a oa Saozon, pe Kembreizdamzianaoudek eus o yezh. Hag e oa o c'hentañ preder lakaat ar vugale da dremen arnodennoù na zalc'he ar C'hembraeg lec'h ebet. (Gwalarn, Niv.21, Nevez-Amzer 1930)

Unan anezho a roas e ali hag e sonj krak ha krenn : "Nann. Goude eizh bloaz m'on bet kelenner, e kav din eo ar gwellañ ober gant ar C'hembraeg an

nebeutañ ar gwellañ. Karout a reomp holl ar yezh kozh evel just, hogen n'eo ket buhez ar skol un dra eus ar galon. Aozañ emgann ar vuhez ne lavaran ket." Ar spered-se a renas er skolioù betek hogos dibenn an 19vet kantved. E 1907, e voe krouet Departamant Kembreat Ministrerezh an Deskadurezh, a vo renet e-pad pell gant daou yezhgarour : Sir Owen Edwards, Enseller Meur, ha Sir Alfred Davies, Sekretour Hollbadus. An aotrounez-mañ a glaskas, muiañ ma c'hell-jont, silañ Kembraeg er skolioù. E 1927, ez embanner al levr pouezhus : "Welsh in Education and Life" (Ar C'hembraeg en Deskadurezh hag er Vuhez) a zo anezhañ danevell un enklask graet gant ar gomision a labouras e-doug 35 devezh a glevas 170 test hag a goustas 1 515 135 lur saoz. Netra eta, na oa bet espernet evit kas an taol da vat.

Setu amañ erbedadurioù an enklask :

En teroueroù kembraek

1. Yezh an Infant School a dle bezañ ar C'hembraeg hepken. (p.196)
2. Er c'hourioù uheloc'h, yezh an deskadurezh evit kregiñ a dle bezañ, dreist-holl mar ne deo ket hepken, ar C'hembraeg. (p.197)
3. Peurvuañ ar Saozneg a vezo desket tamm-ha-tamm, e ster strizh ar ger, hag evit ma vezo desket tamm-ha-tamm, e tlefed kregiñ gantañ e-pad ar bloavezh kentañ pe an eil goude m'en devo kuitaet ar bugel an Infant School. (p.198)
4. Goude m'en devo desket ar skoliad ar Saozneg tamm-ha-tamm, ne vo ket dilezet ar C'hembraeg evel yezh a gelennadurezh evit meur a zanvez. Sklaer eo e vo kelennet dre ar C'hembraeg ar Relijion, ar Skritur Sakr, an Istor, Studi an Natur, ar Yec'hadurezh hag an Embregezh ivez, ha marteze ivez al Lennegezh saoznek. Erbediñ a rae ivez implij ar C'hembraeg da reiñ kente-lioù war an niveroniezh hag an douaroniezh. (pp.199-200)

En teroueroù saoznekaet

5. Yezh an Infant School a dle bezañ ar Saozneg hag ar C'hembraeg a vezo kroget gantañ er c'hourioù uheloc'h an abretañ ar gwellañ hervez boaz ar skol.

Da c'hellout sentiñ ouzh an erbedadurioù-se e oa bet rannet ar vro e teir lodenn :

- 1 - an teroueroù kembraek ;
- 2 - an teroueroù mesket ;
- 3 - an teroueroù saoznek .

### III. AN DIVYEZHEGEZH ABAOE 1927 .

Daoust hag ez eus bet sentet ouzh an erbedadurioù-se ? setu ar goulenn a zeu bremañ dirazomp. Ar respont a vo roet dimp gant "Dysgu Iaith yn yr ysgolion Cynradd - Language teaching in Primary Schools" ("Kelennadurezh ar Yezh er Skolioù Izel") embannet e 1945 gant Departamant Kembreat an Deskadurezh. Reiñ a reomp un diverradur eus ar pennadoù a sell ouzhimp en ur heuilh ar rannadur uheloc'h.

A - Teroueroù kembraek.

Skolioù ar vugaligoù. Ar yezh implijet a zo ar C'hembraeg met ar gelennadurezh n'eo ket kembreat dre ma implijer dreist-holl troidigezhioù diwar skridoù aozet evit skolioù bro-Saoz.

Skolioù ar vugale yaouank. Ar C'hembraeg a zo implijet evel yezh-kelenn. Ar Saozneg a dlefe bezañ kelennet dre gomz, a vez kelennet dre lenn re abred hag a vez implijet evel yezh-kelenn a-raok m'o defe ar skolidi un anaoudegezh sur anezhañ.

Skolioù a bep oad. (All age schools - Ysgolion pob oed). Ar skolioù bihan n'o deus kement a glasoù distag ha c'hoarvezout a ra d'ar vugale

yaouank klevout muioe'h a Saozneg. Koulskoude ez implijer ar C'hembraeg muioe'h evel yezh-kelenn.

**B - Teroueroù mesket.**

Kemmoù a zo c'hoarvezet abaoe 1927. Teroueroù gwechall kembraek a zo bremañ mesket, ha teroueroù gwechall mesket a zo bremañ saoznekaet.

Skolioù ar vugaligoù. Pa vez ar skolidi hanter evit hanter kembraegerien ha saoznegerien e vez aes dispartiañ hervez ar yezh ha sentiñ ouzh gourc'hemmennoù Ministrerezh an Deskadurezh. Met pa vez bihanoc'h niver ar Gembraegerien e vezont beuzet gant ar Saoznegerien, hag alies ivez distroadet, siwazh, yezh ar ger gant yezh ar skol.

Skolioù ar vugale yaouank. En un nebeut skolioù e vez kendalc'het da rannañ ar vugale hervez ar yezh hag e vez graet en doare-se labour mat. E kalz a skolioù all e kentelier ar vugale dre ar Saozneg hag e kelenner ar C'hembraeg evel danvez hepken, pezh-ma c'hwit ket da vagaan er Gembraegerien dispriz evit yezh ar ger.

**K - Teroueroù saoznek.**

Skolioù ar vugaligoù. Saozneg eo yezh hag aergelc'h ar skolioù-mañ. (E lec'h all ez erbeder start krouiñ un aergelc'h kembreat er skolioù).

Skolioù ar vugale yaouank. Nebeut a Bennadurezhioù eus an Deskadurezh o deus klasket kelenn ar C'hembraeg. Darn all o deus klasket hen ober dre c'hoprañ kelennerien ispisial pe gelennerien o doa studiet ar C'hembraeg evit un arnodenn bennak. Diaezamantoù o deus kavet war o hent ha n'o dao ket prederiet warno a-walc'h.

- a) kelennerien n'anavezent ket mat a-walc'h ar C'hembraeg nag an doare da gelenn un eil yezh ;
- b) ar C'hembraeg kelennet evel danvez a chom en diavaez da striv ar skolidi.

Skolioù a bep oad. Un nebeut Pennadurezhioù o deus lakaet kelenn ar C'hembraeg evel danvez ar c'hlasoù uhel, er skolioù a bep oad hag e skolioù ar vugale vras. (Senior Schools - Ysgolion Hŷn). Er re ziwedhañ-mañ ez eus bet gopret kelennerien diplomet gant ar Skol-Veur ha mar ne deo ket bet frouezhus a-walc'h o labour ez eo en abeg da stad izel ar studioù e skolioù ar vugale yaouank.

Neoazh ez eus bet graet labour mat e meur a lec'h ha degas a reomp amañ un testeni a zo bet roet dimp nevez'zo gant unan eus hor c'henvroiz a zo o chom e kêr Aberystwyth : "Va zad-kaer, war-dro 1925, a gelenne hag a rae d'ar vistri all kelenn e Kembraeg darn eus an danvezioù-studi (religion, istor, douaroniezh ha sonerezh) er skol ma oa rener e Pontypridd, ur gêr vras gwall saoznekaet, ha souezhet e voe e-unan gant ar berzh a reas. Ha bravoc'h 'zo, e skolidi a voe degemeret er skol-etre niverusoc'h eget re ar skolioù holl-saozneg, pezh a stankas o beg d'an dud a lavare e oa ur c'holl-amzer evit ar vugale deskiñ Kembraeg." (HOR YEZH, Niv.1, p.12)

War-lerc'h an taol-sell-se war stad ar C'hembraeg er skolioù e ro Departamant Kembreat an Deskadurezh un nebeut alioù erbedadurioù nevez.

**A - Teroueroù kembraek.**

Skolioù ar vugaligoù. Implij an danvez kembreat. Ar gelennerien barrek war an dachenn a dlefe embann traoù nevez.

Skolioù ar vugale yaouank. Lakaat ar vugale barrek da zisplegañ pep tra dre yezh o c'havell, ha gwellaat an doare da gelenn ar Saozneg evel eil yezh.

**B - Teroueroù mesket.**

**B - Teroueroù mesket.**

Skolioù ar vugaligoù. Rannañ ar vugale hervez ar yezh pe bodañ ar Gembraegerien en ur skol pa'z eus meur a hini tost an eil d'eben, ha pourvezañ ar skolioù gant kelennerien niverus a-walc'h. Pep tra a dleer ober evit saveteiñ gwirioù ar Gembraegerien.

Skolioù ar vugale yaouank. Disparti skolioù ar vugaligoù a dlefe bezañ miret e-pad daou vloaz ha da c'houde evit un nebeut kentelioù diwar-benn ar Yezh, ar Relijion, Istor ha Douaroniezh Kembre hag an Naturouriezh pe Studi an Natur.

**K - Teroueroù saoznekaet.**

Krouiñ en holl skolioù un aergelo'h kembreat muic'h c'hoazh eget er skolioù kembraek.

Mar bez graet mat al labour-se e vezo krouet er vugale ar c'hoant da zeskiñ yezh oberourien al lennegezh o deus studiet e troidigezhioù. E-giz-se, studi ar C'hembraeg ne vezo ket dispartiet diouzh labourioù all ar skol, met bez' e vezo un ezhomm ganet diouto ha sur d'ober berzh.

D'an 18 a c'hwevrer 1953, Kuzul-aliañ an Deskadurezh e Kembre a embannas ul levr a 112 pajenn, dindan an titl : "The Place of Welsh and English in the Schools of Wales", frouezh daou vloavezhiaed labour kaset da benn gant 19 den dindan renerezh ar C'helenner R.I?Aaron. Peurvuiañ an testennoù ofisiel diwar-benn ar skolioù a vez divyezhek, met an dro-mañ, en abeg da devder al levr ez eus bet roet un diverrad e Kembraeg hepken, pezh a zo bet tamallet gant tud'zo. Dre vras n'eus netra nevez en danevell-se nemet kement-mañ : ar yezh a zo muic'h-mui en argoll e-touezh ar re yaouank. EB saveteiñ anezhi e kinnig ober divyezhegerien eus an holl Gembreiz. Al lodenn ziwezhañ eus al levr a zo gouestlet da efedoù an divyezhegezh war spered ar vugale hervez studiadennoù graet er broioù all. Peogwir e fell dimp komz eus Kembre, ec'h amprestimp hepken un diverradur tennet eus rentañ-kont Arzel Even e Niv.1 HOR YEZH :  
 ".....ha merzet alies - n'eo ket bepred - e vez ar vugale unyezhek un tammig primoc'h en o studioù eget ar re divyezhek, hogen ne vern penaos, d'an oad a 10 - 12 vloaz e vihana kalz an diforc'h ha ne verzer mui anezhañ er skolioù - stre. Diouzh an tu all, war a lavarer, ar vugale divyezhek a zesk yezhoù all a-soc'h eget an unyezhegerien, hag ivez, - pezh a zo pouezhusoc'h c'hoazh - deskiñ a reont kalz buanoc'h ha kalz gwelloc'h distagañ ar menoz diouzh ar ger - un dra hag a zo dic'hallus a-wechoù d'an unyezheger a-hed e vuhez."

**IV. LABOUR KONTELEZHIOU 'ZO .**

C'hoant hor befe bremañ da reiñ un darsell eus labour Pennadurezhioù an Deskadurezh. Ar skolioù e Kembre a zo dindan ar Pennadurezhioù-mañ :

Ministrerezh an Deskadurezh e Londrez,  
 Departamant Kembreat an Deskadurezh,  
 Ar Pennadurezhioù Lec'hel ,  
 Kuzul-Mererezh ar Skol.

Ar Pennadurezhioù Lec'hel a zo anezho Pennadurezhioù eus ar Kontelezh (Administrative County) pe eus ar Gêr, mar deo bras a-walc'h (County Borough). E Kembre ez eus 13 kontelezh ha 4 County Boroughs : Caerdydd, Abertawe, Merthyr Tydfil ha Casnewydd)

An hanter eus ar mizoù a vez paeet gant ar Pennadurezhioù Lec'hel, hag an hanter all gant ar Gouarnamant. Kontrollet e vez an deskadurezh gant ur C'huzul-Mererezh a 6 ezel, 4 anvet gant ar Pennadurezhioù Lec'hel (4). Ar skolioù ofisiel a vez anvet County Schools, Ysgolion Sirol, Skolioù-Kontelezh.

E miz Here 1953, (Y FANER, Hydref, 7, 1953) rener an deskadurezh e kontelezh Caernarvon a roe an diskleriadurieu-mañ :

1 000 a skolaerien gopraet, 95 % a zivyezhegerien ;  
172 a skolioù izel, 113 o kelenn dre ar C'hembraeg .

Emzalc'h ar gerent saoznek ; tri rummad anezho :

- 1 - ar re a chom souezhet pa ne vez ket desket Kembraeg d'o bugale ;
- 2 - ar re a zo a-enep ar C'hembraeg ;
- 3 - ar re a fell dezho reiñ d'o bugale deskadurezh e Saozneg da gentañ ha goude anaoudegezh eus ar C'Hembraeg.

D'an hevellep koulz, diouzh e du, rener ar skolioù a zo dindan Poellgor an Deskadurezh en Abertawe a zisplege evel-hen stad ar yezh : (Y FANER, Hydref 7, 1953) :

e 1937 9,9 % a gomze ar yezh ;  
e 1953, 3% hepken; 469 anezho a gaver er skolioù izel ha da 90 % e vez kelennet ar C'hembraeg ;  
da 54 eus ar Saoznegerien, er skolioù izel e vez kelennet ivez ar yezh ;  
e 23 skol n'eus tamm Kembraeg ebet.  
235 eus an 965 skolaer a gaver er skolioù izel hag er skolioù-etre a gomz ar yezh pe a studi anezhi.

E dibenn 1952 (Y FANER, Ionawr 7, 1953). Pennadurezhioù an Deskadurezh e kontelezh Y Flint, war ali Mr. Leslie Harries, is-enseller, (Is-Arolygydd) a gase ul lizher d'ar gerent kembraek d'o atizañ da gomz ar yezh ouzh o bugale.

#### V. GANEDIGEZH AR SKOLIOU KEMBRAEK NEVEZ .

Pezh a zo bet diskleriet e daou zanevell ofisiel, "Language Teaching in Primary Schools" ha "The Place of Welsh and English in the Schools of Wales", a oa bet merzet dija gant un nebeut tiegezhioù :

- 1 - ar yezh a zo en argoll e-touezh ar re yaouank ;
- 2 - en teroueroù mesket e vez beuzet ar Gembraegerien gant ar re all ;
- 3 - ne vez ket kelennet gant berzh ar C'hembraeg evel eil yezh .

E gwengolo 1939, "Urdd Gobaith Cymru" (Urzh Goanag Kembre), un doare skoutelezh, a zigore en Aberystwyth ur skol gembraek. Ar gêr-se, dezhi ur Skol-Veur, ur Skol-Uhel a labour-douar, ul Levraoueg-Vroadel, un draezhenn vrav, a zo 70 % saoznek. Da gentañ n'oa nemet 6 skoliad.

E 1947, Poellgor an Deskadurezh e kontelezh Caerfyrddin a save an eil skol gembraek e Llanelli.

E 1951 e oa 15 skol gembraek, hag e dibenn 1953, 26, hep kontañ 5 skol babiged. E pep skol e kaver, well-wazh, 80 bugel, 2 000 en holl.

Ar gerent a zo bodet en ur gevredigezh anvet "Undeb Rhieni Ysgolion Cymraeg" (Unvaniezh Kerent ar Skolioù Kembraek) gant daou boellgor, hini an Hangernoz hag hini ar C'hreisteiz. Poellgor ar C'hreisteiz a zo ennañ daou is-boellgor : is-poellgor-stourm (is-bwyllgor ymgyrch) en deus skoazellet meur a lec'h da gaout ur Skol Gembraek, hag ken-boellgor ar Skolioù Kembraek e Reter Morgannwg.

Evit kompren gwelloc'h berzh ar Skolioù Kembraek ez eo dav dimp anavezout gwelloc'h ar c'hêrioù o deus unan ha doareoù o c'hreuidigezh.

Ysgol Y Lôn-Las en Abertawe. Abertawe, pe Swansea en Saozneg, a oa ur

porzh-mor e kontelezh Morgannwg. War dro 160 000 a dud a zo enni, gant 3 % barrek da gomz ar yezh.

Setu amañ deiziadoù pennañ istor ar skol :

- 10.2.1948. Is-Poellgor ar Skolioù Izel (Is-Pwyllgor Trefnu yr Ysgolion Cynradd) a ziviz digeriñ ur Skol Gembraek e giz taol-esae.
- 30.12.1948. Ar skol nevez a vo digoret e-diabarzh lojeiz skol Y Lôn-Las.
- 5.9.1949. Digoridigezh ar skol : 70 bugel etre 3 hag 8 bloaz.
- 12.9.1949. 92 skoliad.
- 1.9.1950. N'heller degemer nemet ar vugale koshoc'h eget 5 bloaz.
- 16.7.1952. 143 skoliad etre 5 hag 11 vloaz. Poellgor an Deskadurezh a ziviz :
  - paeañ an otokarr evit ar skolidi (tra a bouez e Breizh-Veur) ;
  - diazezañ ar skol evit mat ;
  - digeriñ ur skol all e kornog ar gêr diouzhtu ma vo kavet lojeiz.

Ysgol Y Barri. Kêr Y Barri a voe savet en-dro d'an dokoù e dibenn an 19vet kantved. Poblet e voe gant Kembraegerien deuet eus Caerfyrddin ha Penfro. Evit o ezhommoù speredel e savjod 6 chapel hag un iliz. (Ur chapel a zo atav protestant, hag un iliz a zo azeuldi an Anglikaned). Hiziv, an iliz a zo bet serret, ur chapel a ra c'hoazh gant ar C'hembraeg penn-da-benn, hag unan all diouzhus ar beure hepken ; ar skol-sul, pe ar c'hatekiz evit ar vugale hag an dud vras, a vez graet e Saozneg.

Deiziadoù pennañ ar Skol Gembraeg :

- 7.2.1951. Envod kentañ.
- 9.4.1951. Digoridigezh ar skol.
- 18.4.1951. Gweladenn dileuridi Y Barri da Boellgor an Deskadurezh e reter Mor - gannwg.
- 7.1.1952. Digoridigezh ar Skol Izel gant 17 skoliad.
- 10.12.1952. 30 skoliad er Skol Izel.

Pa'z eas Poellgor Y Barri da c'houlenn ur Skol Gembraek digant Poellgor an Deskadurezh e Reter Morgannwg e voe respontet dezhañ e oa ret bodañ a-walc'h a Gembraegerien vihan. Kement-se a oa un dra ziaes-tre, marteze dic'hallus, e Y Barri ha divizet e voe sevel ur skol-babiged d'ober Kembraegerien gant ar Saoznegerien vihan.

Nebut tre e oa evit deraouiñ, en gwirionez ne c'hortozed ket muico'h, met war-lerc'h ur o'halvadenn 154 goulenn nevez a voe degemeret. Siwazh, ar 17 dija enskrivet a oa barrek hepken e-keñver ar yezh (Linguistically qualified). Kement-se a ziskouez pegen saoznekaet eo ar gêr-se, met ivez pegement a gerent a fell dezho reiñ o deskamant d'o bugale e Kembraeg. Ar gerent-se a zo bet ar Saozneg yezh o c'havell, met yezh o c'hevredigezh istorel a zo ar C'hembraeg.

## VI. DAREMPREDOU GANT PENNADUREZHIOU AN DESKADUREZH .

An danevell "Lec'h ar C'hembraeg en Deskadurezh hag er Vubez" a c'hourc'hemenne sevel skolioù kembraek en teroueroù saoznekaet. E 1938 dileuridi a yeas da c'houlenn ur seurt skol digant Poellgor an Deskadurezh e Kêr Caerdydd, met en aner. Diwezhatoc'h avat o devo o mennad. Ret e vo gortoz digoridigezh Skol Gembraek Llannelli, 20 vloaz goude, evit ma vo sentet evit ar wech kentañ ouzh an erbedadur-se. Lezenn an Deskadurezh (Education Act) votet e 1944, a lavar ivez kement-mañ : "En ur implij ar galloud, ha seveniñ an dever fiziet enno dre al lezenn-mañ, ar Ministr ha Pennadurezhioù Lec'hel an Deskadurezh o devo doujañs ouzh ar reolenn vras-mañ, gant ma vo gallet reiñ deskadurezh efedus ha stummañ kelennerien hep dispignoù re vras evit ar Stad, ar skolidi a dle bezañ desavet

hervez c'hoant o c'herent." (IV,76, P.56)

An darempredoù gant Pennadurezhioù an Deskadurezh a zo aet war wellaat abaoe. Ne roont ket hepken o mennad d'ar c'hevredadoù-kerent a c'houlenn ur Skol Gembraek, met diouzh o zu, evel m'eo o dever, kas a reont o implijidi d'ober enklaskoù ha da welout ha tu a vefe da sevel skolioù ha da vodañ ar gerent. En ur studiañ kudenn an darempredoù-se e welimp penaos eo bet dibunet kudenn an arc'hant.

An holl skolioù-se, nemet hini Luest en Aberystwyth, hag ar skolioù babiged a zo bet savet gant Pennadurezhioù an Deskadurezh ha tleout a reont bezañ lakaet war an hevelep troad gant ar Skolioù Ofisiel. Kement-se a zo bet anza-  
vet e-pad ar bloaz 1953, ar c'heloù a oa bet embannet e bodadeg Unvaniezh Kerent ar Skolioù Kembraek (Y FANER 12.9.1953). Hervez an danevellour an dra-se a oa a-bouez dreist-holl evit pezh a sell dougen ar vugale d'ar skol. Betek neuze, emezañ, ar gerent o doa bet somoù bras da baeañ evit an dra-se. Gellout a reomp eta dezastum e oa bet paeet ar mizoù all gant ar Pennadurezhioù, ar goprou hag al lojeiz. E gouhere 1952 (Y FANER, gorffennaf 16, 1952) dija e welomp Poellgor an Deskadurezh en Abertawe o tivizout paeañ kas ar vugale d'ar skol. Ar skouer a seblant bezañ deuet eus Poellgor Kontelezh Morgannwg war-lerc'h ur brezegenn entanet graet gant an Ao. Stuart Richardson : "N'on ket barrek da gomz Kembraeg ha n'a ket va bugale d'ar Skol Gembraek, met, evidon, ez eo un dra sklaer lakaat ar Skolioù Kembraek war an hevelep pazenn hag ar skolioù all".

Ar skolioù-babiged kembraek digor d'ar Saoznegerien evel hini Y Barri a zo skolioù prevez (voluntary schools - ysgolion gwirfoddol). Ar skolaerezed a vez dic'hopr, hep testeni, anezho mammoù pe skoazellerezed galonek a zeu pep hini d'he zro da zeskiñ d'ar vugale komz Kembraeg.

## VII. TALVOUDEGEZH AN DESKADUREZH .

Ret eo bremañ studiañ paliou ar Skolioù Kembraek Nevez, ha gwelout hag heñ eo bet tizhet ar paliou-se.

Ar paliou da dizhout a oa : reiñ ur gelennadurezh klok dre ar C'hembraeg, kelenn ar Saozneg evel eil yezh en-doare ma vefe barrek ar skolidi d'antren en ur skol eus an eil derez da 11 vloaz. Aes eo gwelout ar skoilhoù a savfe war an hent : deskiñ ar Saozneg hep nozout d'ar C'hembraeg na da ziorradur-spered ar vugale.

Tud a bep seurt o deus meulet al labour, mat e pep keñver, graet gant ar skolioù-se. Setu amañ un nebeut testenioù. "Gweladennet am eus ar skolioù-se (Wyddgrug, Coed Talon, Treffynnon, Queensferry, Y Rhy) ha laouen on o lava-rout ez eo yac'h hag a-rez gant live an deskadurezh a roer enno." Mr. Leslie Harris, Is-Enseller ar Yezh, Pennadurezh an Deskadurezh e Kontelezh Y Fflint. (Y FANER, 7.1.1953). E miz meurzh 1953, Gwilym Bowyer, Penngelenner Skol-Veur Bala-Bangor, a lavare kemend-all eus Skol Gembraek Llandudno : "N'omp ket ni, emezañ, tud taer-diroll (eithafwyr) a glask komz Kembraeg gant an holl ha Kembraeg hepken. Hor pal a zo klask ma vo hor bugale Kembreiz da gentañ, ha goude m'o devo tu da zeskiñ ervat ar Saozneg."

War-lerc'h an diskleriadurioù dre vras-se, setu bremañ traoù resisoc'h, sifroù diwar-benn bugale Skolioù Kembraek Morgannwg o doa tremenet e 1953 arnodenn ar yalc'had-studi evit antren e skolioù an eil derez, roet gant an Ao. David, rener "Unvaniezh Kerent ar Skolioù Kembraek" en un emvod e Treoui.

Ynys Wen, Treoui. 1 kinniget ha degemeret an 20vet war 800.  
Maesteg. 3 bugel a c'honezas ar plasoù : 1, 2, 20. Unan all a dremenas an ar-

modenn wellañ evit mont d'ur skol teknikel.

Aberdâr. 5 degemeret evit skol-etre klasel ha 2 all evit skol Abertâf.

Caerdydd. 5 degemeret ; unan en doa bet 256 poent war 300.

(Y FANER Niv.24, 1953)

Kembreiz avat n'o doa ket gortozet ar sifroù-se evit anavezout talvoudegesh ar gelennadurezh nevez. Tri bloaz goude ma oa bet krouet Poellgor an Deskadurezh en Abertawe a reas ober un enklask e Ysgol y Lôn-Las. Reiñ a reomp ar pennadoù pouezusañ eus an danevell embannet. (Y FANER 16.7.1952)

Klasket ez eus bet en enklask respont d'an div c'houlenn-mañ :

- 1 - daoust hag ez eo deskamant ar vugale en danvezioù-skol kevatal da hini bugale eus an hevelep deskidigezh a zo e skolioù all ar gêr ? Mar ne dint ket, pere o deus gouzañvet ha perak ?
- 2 - daoust hag e ouezo ar vugale-se a-walc'h a Saozneg da 11 vloaz evit bezañ barrek da heuilh ar skol eil derez skoaz-ouzh-skoaz gant bugale eus an hevelep deskidigezh ? (5)

An enklask a oa bet sevenet gant tri den, dileuriad Rener an Deskadurezh, Kenurzhier (Trefnydd) ar skolioù hag un eneoniour. Klozañ a reont o danevell evel-hen :

- 1 - deskamant ar vugale war an danvezioù-diazez a zo kevatal, d'an nebeutañ, d'o deskidigezh ;
- 2 - ar vugale a zo war -nes mont d'ar skol-etre saoznek a oar a-walc'h ar Saozneg. Deuet int a-benn eus kement-se hep koll ar C'hembraeg evel yezh kentañ hag hep gouzañv dilamm-spered (a dwaith - reaction) ebet. Bugale asur, eürus, ha kempouez ez int.
- 3 - evit deskiñ un eil yezh e oa ret gonid amzer diwar goust an danvezioù all. Gortoz a raed kement-se ha sonjal a reer ez eo deuet ar renerez a-benn eus he zaol hep digempouezañ re ar roll-labour. An treserezh hag al labourioù-dorn o deus gouzañvet ar muiañ. Met ar skolaerezed a sikoure ar gerent da lakaat ar vugale d'ober er ger ar pezh a oa bet dilezet er skol dre ziouer a amzer. Ar c'henlabour-se etre ar gerent hag ar skolaerezed en deus gouget frouezh e stúdioù ar vugale.
- 4 - "e koustiañs, e c'hellan lavarout, eme Rener an Deskadurezh, he deus ar skol prouet gwir he c'hrouidigezh tri bloaz 'zo, hag ha deus graet berzh an taol-esse divyezheg. A gont a weler (i bob golwg) n'o deus ket gouzañvet ar vugale en o diorradur-spered dre zeskiñ div yezh war-un-dro, kentoc'h ez eus bet roet dezho un diazez suroc'h d'an diorradur-se dre o gwriziennañ e daou sevenadur." (Y FANER, 16.7.1952)

War-lerc'h seurt testenioù n'eo ket souezhus eta ez afe niver ar skolioù ha niver o skolidi dalc'hmat war greskiñ.

### VIII. SKOLIOU-ETRE HA SKOLIOU NORMAL .

Gwelet hon eus uheloc'h e teue brav-tre bugale ar Skolioù Kembraek da dremen o arnodennoù-antren er skolioù-etre saoznek. Nevezh, ar gerent a fellfe dezho o c'has da skolioù-etre kembraek, n'eus ket anezho c'hoazh. Er skolioù-etre e vez studiet ar C'hembraeg evel danvez hepken ha n'eo ket implijet evel yezh-kelenn.

Ezhomez bras a zo ivez eus ur Skol Normal Kembraek. Evel ma lavare n'eus ket pell ken penn-evezhier an Deskadurezh e Kembre, n'heller ket goulenn digant skolaerien o deus bet o deskamant e Saozneg kelenn pep tra dre ar C'hembraeg gant frouezh. "Ha ma fell dimp, emezañ heuilh hent an divyezheg en holl skolioù e vo ret impij ar C'hembraeg da yezh-kelenn er skolioù izel kerkoulz hag er skolioù-etre." (Y FANER 27.1.1954)

Skolioù-etre hag ur Skol Normal Kembraek a zo goulennet start gant Undeb Cenedlaethol Athrawon Cymru (U.C.A.C. Unvaniezh Vroadel Kelennerien Kembre) (Y FANER, 7.4.1950), Undeb Cymru Fydd (un doare Union Régionaliste) hag Unvaniezh Kerent ar Skolioù Kembraek. (Y FANER 24.10.1953 ha 27.1.1954) (6)

Skourr Penfro eus Urdd y Graddedigion (Urzh an Dud Diplimet), bodet d'an 30 a viz Genver 1954 e Hwlffudd, a embannas ur mennad a roomp ur pennad anezhañ amañ : "Ar C'hammed kentañ d'ober evit dispenn an diaesterioù eo sevel ur Skol Normal Kembraek e-lec'h ma vo kelennet ar C'hembraeg n'eo ket hepken evel danvez, met e-lec'h ma vo ar yezh benveg pennañ an deskadurezh, ha pediñ a reont Bwrdd Addysg (Burev an Deskadurezh) ar Skol-Veur, dre genlabourat gant Poellgor an Deskadurezh Kembre, da gemer an tu da dizhout ar pal-se." (Y FANER, 17.2.54)

#### IX. ENEBADENNOU .

Divyezhegezh ofisiel Departamant Kembre an Deskadurezh, hag ar skolioù kembraek nevez a gav, evel-just, enebourien war o hent.

D'ar 31 a viz Meurzh 1949, hor boa selaouet un abadenn skinet gant ar B.B.C. anvet "The voice of the people at Aberystwyth". Danvez an diviz a oa hemañ : "Hag emañ a-du gant an divyezhegezh e Kembre?". Diwar an 22 a dud o doa roet o ali, 5 hepken a oa a-grenn a-enep kelennadurezh ar C'hembraeg dre ma ne oa ket ur yezh kenwerzhel, ur yezh anavezet e-diavaezh Kembre. Ar re all, en o zouezh div Saozezh, a oa a-du evit abegoù sevenadurel ha broadel.

Gwech ha gwech all ivez e tamaller e roer re a blas d'ar C'hembraeg hag e tilezer ar Saozneg. Ar respont d'ar rebech-se a vo roet dimp gant ur memorandoum aozet gant ar sekretour hag embannet gant Skourr Kontelezh Caernarfon eus Unvaniezh Vroadel ar Gelennerien:

a) stad ar Saozneg, sklaer eo, a zo diogel a-grenn bremañ el lec'hioù e-lec'h m'emañ ar C'hembraeg en e greñvañ. Doareoù-bevañ hag ar gevredigezh e Kembre an 20vet kantved a ra m'eo dic'hallus da lodenn vrasañ ar bobl tremen hap gouzout Saozneg. N'eus riskl ebet e chomfe hep bezañ kelennet e skol ebet. Ar pezh a zo ezhomm eo kelenn ur yezh reizh.

b) Stad ar C'hembraeg a zo disheñvel a-grenn. Emañ en argoll. Kudenn ar C'hembraeg en teroueroù kembraekañ a zo mirout ar yezh bev, hep komz eus he c'helenn en un doare reizh. Sonjomp e tle an holl dud a garfe gwelout tizhout pal an divyezhegezh kounaat dalc'hmat an diforc'h bras-se a zo etre stad an div yezh." (Y FANER, 21.10.1953)

A-wechoù ivez e weler Pennadurezhioù Lec'hel an Deskadurezh, evel Poellgor an Deskadurezh e Castell Nedd, Kontelezh Morgannwg, o nac'h digeriñ ur Skol Gembraek e sigur n'oa ket ezhomm anezhi. Ur pennad goude, Rener an Deskadurezh e Morgannwg, en ur respont kaset d'ul lizher kaset dezhañ gant un nebeut kerent a nac'he ivez krouiñ ur Skol-Vabiged war zigarez ne oa ket a lojeiz dereat. (Y FANER, 19.4.1950)

#### KLOZADUR .

Ul labour souezhus a zo bet kaset da benn e Kembre abaoe 1947 gant tud emskiantek, pennek ha gredus. Kement-se a c'hellomp dezastum diouzh ment ar skoilhoù o deus kavet war o hent hag an alioù-mañ roet gant A.T.Davies d'ar re a garfe krouiñ ur Skol Gembraek. Da gentañ, sevel ur poellgor bihan ; d'an eil, mont da weladenniñ ar gerent da respont d'o arvaroù ha da zisplegañ dezho pezh a zo bet sevenet el lec'hioù all.

War Y FANER eus 21 a viz Genver 1954, T.Raymond Edwards a geñver emsav ar

Skolioù Kemraek gant emsav ar Skolioù-Red-Dired krouet gant Gruffydd Jones e-pad an 18<sup>vet</sup> kantved. E-doug 24 bloaz e voe digoret 3 500 klas ha kenteliet 160 000 diskibl war al lenn hag ar c'hatekiz, ha kement-se gant skoazell aluzonoù ar ar vondianed. "Dieubiñ an eneoù a oa pal Gruffydd Jones. Ar skolioù hon eus komzet anezho hiziv a c'hell bezañ binvioù a-bouez el labour meur-se eo dieubidigezh Ene ar Vroad Kembraek."

Ploueg-ar-Mor, 4 a viz Meurzh 1954.

Notennoù :

- (1) - Ar studiadenn-mañ a zo bet lennet dija gant un nebeut tud. O lizhiri, hag ar re a reseviup a vo lakaet en Niv.2 SKOL.
- (2) - Ar C'hembraeg a oa gwechall yezh Kembre a-bezh. War HOR YEZH, Niv.1, e vo kavet ur gartenn hag un daolenn eus stad ha diskar ar yezh.
- (3) - "Education in Wales", p.11. D'ar mare-se e oa muioc'h a Gembreiz dre gant barrek da lenn ha da skrivañ Kembraeg eget n'oa a Saozon barrek da lenn ha da skrivañ Saozneg. (David Davies, Kembre)  
An tri Aotrou-se a oa izili eus an Iliz Ofisiel. Kembreiz, hogos holl, a oa "nonconformisted".
- (4) - N'omp ket deuet a-benn da c'houzout piv a anv an daou ezel all.
- (5) - Implijet hon eus ar ger-mañ evit lavarout ar galloud da zeskiñ.
- (6) - Hag ivez gant ur Skolaj eus ar Skol-Veur Vroadel. (David Davies). Pevar skolaj a zo oc'h ober ar Skol-Veur Vroadel ; unan e pep hini eus ar peder c'hêr-mañ : Caerdydd, Abertawe, Aberystwyth ha Bangor. (E Skol-Veur Oxford, ez eus 21 skolaj hag en hini Cambridge 17.)

LEVRLENNADUREZH

P.Mocaer AN EOST, Juin 1943 : "L'Enseignement bilingue à l'étranger."  
Ministry of Education, Welsh Department :

Language teaching in Primary Schools, 1945

Education in Wales 1948

Education in Rural Wales, 1949

Bilingualism in the Secondary School in Wales, 1949

The Place of Welsh and English in the Schools of Wales, 1953

(ar 5 levr-mañ, e Saozneg hag e Kembraeg, a zo bet embannet gant His Majesty's Stationery Office, London.)

W.Eric Jackson "Local Government in England and Wales", Penguin books.

Centre d'Etudes Pédagogiques. "Le Problème de l'Ecole : Angleterre."

Edition de "Témoignage Chrétien".

Dastumadenn ar gelaouenn sizhuniek e Kembraeg : Y FANER

Gwalarn, Niv. 21

Hor Yezh, Niv. 1

- 
- 1 - La langue maternelle est pour chacun le moyen naturel d'expression et l'un des premiers besoins de l'individu est de développer pleinement sa capacité d'expression.
  - 2 - Chaque élève devrait commencer ses études scolaires dans sa langue maternelle .
  - 3 - Il n'existe rien dans la structure d'une langue, quelle qu'elle soit qui l'empêche de devenir un véhicule de la civilisation moderne....

TAOLENN-GENVERIAN AN DESKADUREZH

23

| <u>Primary Schools</u>                                                                       | <u>Ysgolion Cynradd</u>                | <u>Enseignement Primaire</u>                  | <u>Skolioù Izel</u>                 |
|----------------------------------------------------------------------------------------------|----------------------------------------|-----------------------------------------------|-------------------------------------|
| Nursery Schools (1)                                                                          | Ysgolion weithrin<br>(dindan 5 bloaz)  | Jardins d'Enfants                             | Kindergarten                        |
| Infant Schools                                                                               | Ysgolion babanod (5-7 bl)              | Ecoles maternelles                            | Skolioù babiged (3-6)               |
| Junior Schools                                                                               | Ysgolion y Plant Ienaf<br>(7-11 bloaz) | Cours préparatoire                            | Kour Stummañ (6-7 bl.)              |
| (Scholarship examination)<br>(2)                                                             |                                        | Cours élémentaire                             | Kour Izel (7-9 bloaz)               |
| All Age Schools<br>(a gaver enno un Infant School hag ur<br>Junior School.)                  | Ysgolion pob oed                       | Cours moyen<br>(Examen d'entrée en 6ème)      | Kour Krenn (9-11 bl.)               |
|                                                                                              |                                        | Cours supérieur                               | Kour Uhel (11-12 bl.)               |
|                                                                                              |                                        | (gant arnodenn ar C.E.P. da 14 bloaz )        |                                     |
|                                                                                              |                                        | Cours Complémentaire                          | Kour Klokaat                        |
|                                                                                              |                                        | (gant arnodenn ar B.E.P.C. da 15-16 bloaz)    |                                     |
| <u>Technical Schools</u>                                                                     | <u>Ysgolion technegol</u>              | <u>Enseignement technique</u>                 | <u>Skolioù Teknikel</u>             |
| (technical diploma)                                                                          |                                        | Centres d'Apprentissage                       | Kreizenoù micherel<br>(14-17 bloaz) |
|                                                                                              |                                        | (gant arnodenn ar C.A.P.)                     |                                     |
|                                                                                              |                                        | Collèges Techniques                           | Skolajoù teknikel                   |
|                                                                                              |                                        | ( gant arnodenn ar B.I. - Brevet Industriel ) |                                     |
| <u>Secondary Schools</u>                                                                     | <u>Ysgolion Uwelradd</u>               | <u>Enseignement du Second<br/>Degré</u>       | <u>Skolioù an Eil Derezh</u>        |
| Grammar Schools                                                                              | Ysgolion gramadeg                      | Ens.Second.classique                          | Skolioù etre klasel                 |
| Modern Schools                                                                               | Modern Schools                         | Ens.Second.moderne                            | Skolioù etre modern                 |
|                                                                                              |                                        | (arnodenn ar B.E.P.C. da 15 - 16 bloaz )      |                                     |
| School Certificate <u>pe</u> Matriculation (3)                                               |                                        | Kentañ lodenn ar Vachelouriezh .              |                                     |
| Higher Certificate                                                                           |                                        | Eil lodenn ar Vachelouriezh .                 |                                     |
| Further Education. (a zo ur Skol evit an dud vras da ledanaat o diorradur-spered = culture ) |                                        |                                               |                                     |



skrid Pêr Denez hag an notennoù gouestlet da vuhez ha da oberoù ar varzhed. Tamall a c'hellfed d'an dastumer dibaboù'zo ha bezañ dilezet a-grenn ar barzhonegoù hir ; tu a oa da dennañ diouto pennadoù.

Goulenn an tri levr digant R.HUON, 23 rue de la République, Brest .  
C.C.P? 684 08 RENNES

LENNOMP, KOMZOMP HA SKRIVOMP AR BREZHONEG, gant J.Tricoire, 64 pajenn lies-skrivet 21x41.

An oberenn-mañ a zo un doare "Assimil", dezhi holl berzhioù mat an doare-kelenn-se. Amañ e kaver ouzhpenn poelladennoù a zo heñvel ouzh ar re a vez darbareet gant al levrioù skol gallek. Troidigezhioù a gaver ivez. Ne blij ket din kalz ar seurt poelladennoù evit ar vugale; zoken pa ouzont mat ar Brezhoneg komzet e kaver en o zroidigezhioù gallekadurioù, ha vice-versa.

An Dr.Tricoire a zo deuet a-benn da aroueziañ ar reizh dre an daoubik war an anvioù gwregel, "an itrön"; kreñvadur pe wannadur ar gensonenn-dibenn, "un asied<sup>t</sup> ha nep<sup>b</sup> aval"; al lizherenn gemmet dre stagañ anezhi ouzh ar ger a-raok; rumm ar c'hennadur dre ur varrennig-sonn, stouet pe ur c'hloched-kromm, "daout<sup>t</sup> di, heñ zi, hoñ tant". Adalek ar bajenn 38 e stagerañ gensonenn gemmet ouzh derou ar ger, "piw a p'ign ?"; an taol-mouezh er gerioù hag er frazennoù dre islinennañ. D'am sonj an holl arouezioù-se, hag a zo ijinus tre, ret eo hen anzav, a dlefed implij hepken evit ar skouerioù-yezhadur hag an taolennoù. An arouezioù-diforc'hañ a zo atav risklus evit ar vugale, ha dizaliet int ivez gant an UNESCO, (op.cit.p.71). A-walc'h e vefe peurvu-iañ islinennañ ar gerioù pouezmouezhiet war ar silabenn ziwezhañ. An distagadur ivez, hag a c'hell bezañ ur skoazell d'an dud vras, a rento ur servij fall d'ar vugale.

An doare-skrivañ implijet a zo dre vras hini 1941 hep ar ZH, a zo aroueziet 2. Kavout a reer "kreski, hira, piw, diw, emâ", e-lec'h "kreskiñ, hirañ, emañ". Met perak skrivañ neuze "hiziv, amañ" ? Un nebeut gerioù a zo bet skrivet diouzh doare-distagañ bro-Leon : "léaz, er-méaz, dieasoc'h" (p.p.42, 55, 59)

Evit an distagadur da implijout er skolioù emañ a-du gant an hini a vo an tostañ d'ar yezh skrivet; e-giz ma ra ar Brotestanted gant ar c'hantikou brezhonek. Evel-se e paouezo tamm-ha-tamm ar Galleg da vezañ al "lingua franca" (yezh an darempredoù) e Breizh-Izel, ha n'eus forzh penaos e viro distagadur pep hini blaz ar c'horn-bro. Evit an divvogalennoù AE, AO e kavan gwelloc'h avat o distagañ ê, ô e gerioù evel "rae, kaer, maer, taol, Paol".

Treger Uhel (p.11) a zo moarvat bro-Ouelou hag ar parrezioù nesañ, etre al Leñv hag an Trev, a vez anvet gant tud ar vro : Treger-Vihan. E Gouelou e vezer techet da virout pouezmouezh ar wrizienn ha kemend-all e Treger-Vihan evit gerioù-zo. War an "Atlas Linguistique", n'eus nemet ur barrez eus Treger-Vihan, Sant-Fiakr, hag a zo kentoc'h eus Kernev.

Spi hon eus e vo moulet an oberenn-mañ ur wech bennak. Neuze e vefe gallet sevel skeudennoù un tamm brasoc'h hag aeriñ ar pajennoù d'ober ul levr plijus d'an daoulagad.

P.S.- Emaomp o paouez resev ul lizher digant an Dr.Tricoire: "Ho trugarekaat a ran da vezañ kaset din ho rentañ-kont. Koulskoude e c'houlennan an aotre da lavarout deoc'h n'eo ket an dra-se a felle din kaout diganeoc'h. Pezh am eus kaset deoc'h n'eo ket ul labour peurechuet : kentelioù-arnodiñ ar re-se eo, ha netra ken. Kaset int bet da veur a vestr-skol. Diganto evel diganeoc'h c'hwi e c'hortozañ alioù da c'houzout penaos sevel ar c'hentelioù a vo embannet goude-se."

## A-DREUZ LENN .

CHRONIQUE DE TOPONYMIE, en "Annales de Bretagne", No.1, 1953, 400 lur e Ti Plihon, Roazhon.

Erbediñ a reomp d'hol lennerien an daou bennad "Comment dresser un répertoire de lieux-dits", gant Guy Souillet; "La Notation des toponymes bretons", gant Pierre Trépos. Pa varv ar yezh war vuzelloù ar re yaouank ez eus un dra hag a chom bev c'hoazh : an anvioù lec'hioù a bep sourt. An nebeut displegadennoù a vo gallet reiñ d'ar vugale a blijo dezho kalz dalc'hmat hag a c'hellfe bezañ un derou da studi istor ha douaroniezh ar gumun. Alioù a bouez a vo kavet en daou bennad-mañ.

E Ploueg-ar-Mor, bro-Ouelou (Plouezec, CdN) e lenner war ar c'hadastr : "Toul ar lan, Lein ar lan". En distagadur a-vremañ avat ne glever ken ar ger-mell.

L'EMPLOI DES LANGUES VERNACULAIRES DANS L'ENSEIGNEMENT, embannet gant an UNESCO, hep anv oberour, 171 pajenn 13x22; priz 300 lur da gas da Société Générale, 45, avenue Kleber, Pariz (C.C.P. 21279PARIS) pour compte Librairie Unesco.

An UNESCO a zo a-du ma vefe kelennet ar vugale, hag an dud vras dizesk, dre o yezh c'henidik pa vez posubl, hag evit tizhout ar pal-se e laka studier holl yezhoù ar pobloù warlerc'hiet : reiñ dezho un doare-skrivañ, unvaniñ ar rann-yezhoù edoare pe zoare, ha krouiñ gerioù nevez. Skoilhoù a bep sourt a sav evel just war an hent hag unan eus ar re vrasañ a seblant dont eus an dud int o-unan pa n'o devez ket fiziañs en o yezh. (Pennad I). Un emvod a ouizieien barrek e Pariz, e dibenn 1951 a studias an doareoù da zispenn an holl skoilhoù (Pennad II) ha da gelenn an eil yezh, pe ar yezh-skoazell, a dlefe bezañ ur yezh a dalvoudegezh etrevroadel.

Ar Pennad III a zo un dastumad danevelloù diwar-benn taolioù-esae. An hini konteliusañ evidomp eo hini Iloilo, er Filipinezoù. Goude tri bloavezhiad studi, ur rummad bugale skoliataet en o yezh a oa trec'h, evit pezh a sell an deskanant hag an anaoudegezh eus ar Saozneg, o doa desket e 6 miz, d'ur rummad all a oa bet skoliataet e Saozneg hag o doa desket o yezh c'henidik evel danvez hepken. A-raok kregiñ gant an taol e oa bet dibabet daou rummad kempouez e pep keñver.

Al levr-mañ ne bouez ket kalz war dalvoudegezh sevenadurel ar yezhoù bihan. (En aner hon eus klasket ur ger evit "langue vernaculaire") Tud'zo, eus ar gomision, a sonje en dra-se, en o zouezh an Ao.Sauvageot, kannad ar Frañs. (Gwel an notenn 1 p.76)

Talvoudegezh deskadurel, desavadurel ha sevenadurel (instructif, éducatif, culturel) ar yezhoù a zo displeget don ha sklaer en un danevell liesskrivet, hep titl nag anv, deuet eus Kembre, a vo studiet en eil niverenn SKOL

BARR-HEOL, Niv.2. Editorial an niverenn ziwezhañ a zo unan eus ar gwellañ penna-  
doù skrivet 10 vloaz'zo diwar-benn lec'h ar Brezhoneg er skolioù. (Komanant 100  
lur. - P.Even, 18 bld.Clémenceau, Gwengamp. C.C.P. 508.07 RENNES)

UN PAYS AGRICOLE MODERNE. (Compte rendu d'un Voyage d'Etudes aux Pays-Bas) gant  
Denis Escargueil, Inspecteur d'Académie des C.d.N. ha Fernand Ausset, directeur  
des Services Agricoles de l'Aude. 94 pajenn 21x13, luc'hskeudennoù niverus,  
priz 200 lur da gas war gont-red M.l'Inspecteur d'Académie à St.Brieuc CCP 16023

N'eo ket hepken war dachenn kelennadurezh ar yezhoù bihan emañ ar Frañs war-  
lerc'h broioù evel an Izelvroioù, met ivez war dachenn kelennadurezh al labour -  
douar. Kement-se a c'hellomp tennañ eus al levr-mañ, skrivet resis, sklaer ha  
bev.

" S K O L "

Dastumadenn c'hwec'hmiziek a gelenouriezh  
(Gouel-Yann ha Nedeleg)

Rener : A.ar C'halvez, Rener Skol Sant Erwan  
e Ploueg-ar-Mor

Priz an niverenn : 100 lur

Priz ar c'homanant : 200 lur

Ar profoù a vezo degemeret gant anaoudegezh vat.

-----  
Kas al lizhiri, ar skridoù hag an arc'hant da

M.l'Abbé Armand LE CALVEZ  
Directeur Skol Sant Erwan  
Plouezec. (C.d.N)  
(C.C.P.RENNES 863 85)

Liesskrivet e Ti Mari J.MOULIN  
22, straed Gurvan, 22  
R O A Z H O N

" S K O L "

Dastumadenn c'hwec'hmiziek a gelenouriezh  
(Gouel-Yann ha Nedeleg)

Rener : A. ar C'halvez, Rener Skol Sant Erwan  
e Ploueg-ar-Mor

Priz an niverenn : 100 lur

Priz ar c'homanant : 200 lur

Ar profoù a vezo degemeret gant anaoudegezh vat.

-----  
Kas al lizhiri, ar skridoù hag an arc'hant da

M. l'Abbé Armand LE CALVEZ  
Directeur Skol Sant Erwan  
Plouezec. (C.d.N)  
(C.C.P. RENNES 863 85)

Liesskrivet e Ti Mari J. MOULIN  
22, straed Gurvan, 22  
R O A Z H O N